

# AR VUHEZ



# KRISTEN

EVIT KEMENT A SELL OUZ :

ar c'houmananchou nevez;  
ar c'houmananchou koz deuet ar mare d'o  
faea;  
an adress da chanj, hag all :

SKRIVA DA :

Monsieur le Directeur de Ar Vuhez Kristen,  
38, Avenue de la Marne.  
Lorient (Morbihan). C. C. 209-81.

EVIT KEMENT A SELL OUZ :

ar skridou embannet, pe da embann er ge-  
laouenn.

SKRIVA DA :

Père Médard.  
Couvent des Capucins.  
Roscoff. (Finistère)

TAOLENN SKIDOU MIZ KERZU

Kenteliou an Aviel.....	p. 233
Ar Werc'hez Vari ganet dibec'h.....	p. 235
Boutik Satan.....	p. 236
Komzou flour oberou kalet!.....	p. 238
Mision Loc-Maria Plouzané.....	p. 240-241
Deveriou ar c'hristen: ar maro.....	p. 242
Er Spagn. Ar veleien merzeriet.....	p. 243
Hunvre ha pedenn.....	p. 245
Paourkez Mamm!.....	p. 246

*Kenteliou an Aviel*

Jezuz a gomz d'e Ziskibien eus e Basion  
Ret eo beza henvel ouz eur c'hrouadur evit  
mont da rouante-lez an Nenv.



Tostaat a rae an eur ma tlie Jezuz gouzañv ha met-  
vel evit silvidigez an dud, hag Hor Salver en doa  
aon n'o dije fallgalonet e ziskibien ouz e welout o  
koueza etre daouarn e enebourien. Evit mirout  
outo da goll neuze ar sonj e oa Doue, e falvezas  
gant an komz d'ezo splannoc'h splanna eus an holl  
boaniou a dlle koueza warnan hep dale. « *Lakit  
doun en ho spered, emezan, an dra-man : Mab  
an den a gouezo etre daouarn e enebourien; la-  
kaet e vo d'ar maro, ha d'an trede devez goude,  
Hen a savo eus a varo da veo.* »

Met ne gomprenent ket kalz ar pezh a felle d'e-  
zan lavarout, hag e kredent e kuze outo eul lo-  
denn eus ar wirionez. N'hellent ket en em ober  
ouz ar sonj e vefe lakact o Mestr d'ar maro, hag  
e teufe adarre da veza beo. Ouspenn-se ne gredent ket goulen  
digantan sklerijenn, gant aon da glevout marteze komzou poani-  
soc'h c'hoaz evito. Evel-se, gwelloc'h e oa ganto chom en arvar  
diwar-benn eun dra ha na oa mat nemet da sponta.

\*\*



Daoust hag ho Mestr ne bae ket an daou skoed  
dleet ? — O faea 'ra », a respont an Abostol.  
Per a ya neuze en ti edo Jezuz ennan, ha ker-  
kent Hor Salvar a lavar d'ezan : « *Simon, lavar  
d'in da sonj diwar-ben an dra-man : rouaned an  
douar diwar biou e savont-i ar c'hargou ? Diwar  
o bugale, pe, diwar an estren ? — Diwar an es-  
tren* », a respont Per. « *Evel-se 'ta, eme Jezuz,  
bugale ar roue n'o deus ket da baea. Met, evit  
na rôin ket d'ezo skouer fall, kerz betek al lenn,  
taol da higenn ha tenn ar c'henta pesk a grogo;  
digor d'ezan e veg hag e kavi ennan eur pezh arc'hant.  
Kemer ar pezh arc'hant-se da rei da baotred an tailhou  
evidoun hag evidout.* » Setu aze c'hoaz, eur burzud  
hag a zo awalc'h, hen e-unan, evit diskouez  
ez eo Jezuz Doue, rak Per en doa graet evel ma  
c'houlenne Jezuz, hag an traou a zigouezas evel  
ma oa bet lavaret d'ezan.

Pa oa bodet an diskibien en ti, Jezuz a c'houlennas diganto :  
« *Diwar-benn petra e komzec'h en hent ?* » Hini ebet n'en doa

kredet respont d'ezan, rak divizet o doa etrezo da c'houzout pe hini anezo a vije an uhela e rouantelez o Mestr. O sonj a oa atao en dije Jezuz savet eur rouantelez war an douar, ha roet enoriou ha madou ar bed-man d'e ziskibien muia-karet. Hor Salver, en e vadelez a fell d'ezan a-grenn o difazia : « *Ma fell da unan bennak, emezan, beza ar c'henta em rouantelez, en em lakit breman an diweza, ha bezit servijer an holl.* »



er vel a reas neuze eur bugel a oa eno, ha goude beza poket d'ezan e lakaas anezan e-kreiz e ziskibien hag e lavar d'ezo : « *E gwirionez, m'hel lavar d'eoc'h ma ne zeuit ket da veza henvel ouz eur c'hrouadur, n'ho po ket perz e rouantelez an Nenv. An neb en em lakaio izel evel ar c'hrouadur-man, a vo ar brasa e rouantelez an Nenv. Ar bihana ac'hanoc'h, hennez eo, e gwirionez, ar brasa.* » Setu komz Hor Salver : ret eo beza henvel ouz eur bugel evit beza degemeret er baradoz. Poaniomp, da gompren ar gomz-se, komz Mab Doue.

Eur c'hrouadur n'eus ennan na lorc'h nag ourgouilh; n'eo ket nec'het gant an enoriou, ne glask ket en em sevel uheloc'h eget ar re all. Eur c'hrouadur ne gred ket e fallentez an dud, ne gompren ket ar gevier, an troiou kamm. Setu ar pezh a defe beza eur c'hristen evit beza gwir diskib da Jezuz-Krist. Na dishenvel omp diouz ar pezh a c'houlenn Jezuz diganeomp !

Diwar-vreman poaniomp da veza dre eur wir binijenn ar pezh n'omp ket bet a-raok. A-hend-all ne vimp ket degemeret er baradoz. Flastromp eta dindan hon treid an ourgouilh; hag e-lec'h klask, evel ma reomp, beza prizet hag enoret gant an dud, gwelomp petra omp e gwirionez : tud krouet, da lavaret eo, netra ac'hanomp hon-unan hag, ar pezh a zo gwasoc'h pec'herien, ha marteze, pec'herien vras a veritfe beza disprizet gant an holl.

Eur c'hrouadur n'en deus ket a boan o senti ouz e dud nag ouz kement den o deus galloud warnan. Greomp eveltan hag e-lec'h en em sevel enep d'ar re en deus Doue lakaet dreistomp, da veza mestr warnomp, sellomp outo bepret gant daoulagad ar feiz, ha neuze e vo aes d'eomp senti outo, dre ma welimp Doue enno.

Eur c'hrouadur ne oar ket petra eo ar gasoni hag an avi. Gour-drouzet hoc'h eus anezan ha lakaet da ouela ? Ankounac'haat a ra kerent ar boan hoc'h eus graet d'ezan, ha dont a ra da veza ken karantezus ha ken dous hag a-raok. Ha bez' ez omp-ni evelse ? Ha gouzout a reomp-ni ankounac'haat ha pardoni dioustu an droug a vez graet d'eomp ? Siouaz ! nann : alies e reomp ar c'hontrol. Evit an distera tra e taeromp, e kounnaromp, e klaskomp memes a-wechou rei droug evit droug; poan hon eus o pardoni.

N'eo ket evel-se, en deus graet Hor Salver, an hini a dleomp kemer skouer diwarnan. Pa gleve o lavarout pep seurt gevier en e eneb e chome hep digeri e vuzellou da respont. Pa voe staget ouz ar Groaz, e pede evit e vourrevien. Ret eo d'eomp ober eta eveltan, ma fell d'eomp beza eus e ziskibien. Diaes bras, e lavaroc'h-hu marteze, eo beza parfet ! — Ne vo ket ken diaes d'eoc'h ma labourit da veza izel a galon evel eur bugel, hervez ma c'houlenn Hor Salver diganeoc'h.

## Ar Werc'hez Vari ganet dibec'h



Ar wirionez-se a zo diazezet war deir roc'h :

1854

Hon Tad Santel ar Pab a ro da anaout ha da gredi d'ar bed a-bez eo ganet dibec'h ar Werc'hez-Vari, eo ganet hep kaout war hec'h ene ar pec'hed orijinel.

Ar c'helou-se a gargas a levenez kalon kement gwir vugel Mari a oa war an douar.

1858

Ar Werc'hez en em ziskouez e Lourd. Ha pa c'houlenn Bernadetta : « Pe hano ho peus ? » e klev ar c'homzou-man : « Me eo an hini 'zo ganet dibec'h ».

1854 a zo, koulz lavaret, skoret gant 1858. Er bloaz 1854, Hon Tad Santel ar Pab a lavar : « A Werc'hez a zo ganet dibec'h. »

Er bloaz 1858 Ar Werc'hez hec'h unan a lavar : « Me eo an hini a zo ganet dibec'h. », evel p'he defe lavaret : « Reiz kenan en deus komzet ar Pab ac'hanon. Hirio e teuan da harpa e gomzou gant va c'homzou d'in va-unan. »

### Hag abaoue....

N'eo ket ehanet Doue da ziskouez pegen gwir oa komzou e vamm, dre ar burzudou a zigouez bemdez e Lourd.

Ma ne vefe ket bet gwir komzou Hon Tad Santel ar Pab.

M'en defe Bernadetta klasket fazia o konta he doa gwellet ar Werc'hez hag he c'hlevet o komz, daoust ha deuet e vefe bet Doue da ober e Lourd, ar burzudou ne ra e nep leac'h all ebet.

Pa c'houlennomp eta, ha ganet eo dibec'h ar Werc'hez ? Er bloaz 1854, ar Pab a respont : Ya. Er bloaz 1858, ar Werc'hez a respont : Ya. Abaoue Doue a gendalc'h da respont : Ya. Teir respont, teir roc'h e zo diazezet warno hor feiz.

DRADEM.

## « BOUTIK SATAN »

O welet traou a zo, e kav d'in alies, ez eus war an tammik douar-man eur rumm dud a zo o labour, a c'hellfed lavaret, dismantri, disunani, sklabeza, laza korfou hag eneo : ar re-se eo — gwaz a ze d'ezo — kalz eus an dud a zalc'h ostaleri, kalz eus an ostizien. Stag ouz o bod-ilio, me rofe ali d'ezo da lakât ar skritell-man, an hini hebken a zere outan : « Boutik Satan », setu aze hag a vije an hano gwirion.

Deac'h diweza e welis kement-man : Eun tad a familh, nao grouadur d'ezan, seac'h e gornailhenn moarvat, abaoue ar sul, a zirede mintin mat da di va amezog da derri e zec'hed. Evit ar paour ma 'z oa, anat d'eoc'h, n'oa ket mat eur banne dour. Eur chopinad gwin da genta. E-doug ar mintin e oa chaog ha glabous gant hor pabor : dispennet hemañ, ribinset henhont, strinket glaourenn ouz an holl. Eur seurt labour, na petra-ta, a zigasas eur sec'hor e kornailhen va den, hag araok kreizdeiz meur a chopinad a voe kluket, ken brao ma oa beuzet, pell a oa, tammik skiant vat hor breur paour.

Taolet er-maes, e ruilhas Laouig war gwen e groc'hen er foz, el leac'h ma chomas da c'hrozmolat ha da gouskat betek ar pardaez.

Eun tammik avel fresk, hag e hanter-zivorfilas hor pabor; met e staon a skarnile atao; ha pa savas war e dreid e voe evit distrei da stal ar gwin.

Hag e kav d'eoc'h e voe sarret an nor outan ? O ! nann. Arc'hant eur banne a zo gantan c'hoaz.

Er gear nao grouadur a zo o leñva gant an naoun. Ar c'hwreg, glac'haret, a c'hed he zruilhenn da zont d'ar gear, brao d'ez i ma ne vez ket kaset, emberr, er-maes da loja — ne vije ket an dro genta — Met petra 'ra se d'an ostiz, eun den a galon vat ! ha n'eo ket evit refus eur banne da zen... dreist-holl, pa vez arc'hant en e c'hodell ! Ha neuze daoust hag an ostiz n'en deus ket ivez e vara da c'hounit ? Ha peogwir e rank e c'hounit, e c'hell hen ober n'eus forz penaoz... zoken diwar goust eun ene... Diwar goust eun ene ? Ya, va zud, rak ar mezhvier en deus ivez eun ene, prenet ha gwalc'het gant gwad eun Doue — Met paotr an ostaleri n'eman ket o terri e benn gant ar sonjou-se. E glevet am eus o lavaret e tlefe kement muntret a zo beza krouget. Met

— 237 —

rei ar maro d'eun ene, daoust hag an dra-se a zo eun torfed ?

Daoust ha ne vefen ket me eun torfetour eus an dibab, ma rofen da eva d'eur c'hrouadurig, an ampoezon en defe c'hoant da gaout. Siouaz, ar mezhvier, d'am sonj, a zo diskiantoc'h eget eur bugel. Dallet, chadennet eo gant e dech milliget. Hag e kav breudeur kriz awalc'h da rei an dourn d'ezan evit starda muioc'h c'hoaz warnan an uhal-se m'eman dalc'het gantan.

Malloz d'an dud-se ! Diwezatoc'h e rentint kount da Zoue eus an eneo e vezint bet kaoz d'ezo da veza daonet.

O ! an tavarniou, piou lavaro an holl zrougou o deu laketaet da ruilh war ar bed.

Piou ne anavez ket en-dro d'ezan tiegez pe diegez, bet pinvidik, aet e stal da stalig dre foranerez eun tieg mezhvier.

Piou lavaro trubuillou niver a vugale, na c'hellont da sul tanva plijadur ebet, gwasket ma 'z eo o c'halon dre sonjal ne dremeno ket evito deiz santel an Aotrou Doue araok beza gwelet o tont d'ar gear o zad mezo dall, war e vuzellou komzou trenk evit o mamm hag e zourn savet d'he skei ha d'he zeurel er-maez.

Hag ez eus, pebez tristidigez ! tud yaouank o teski ar vicher-se en ostaleriou — micher al lounker, a lavaran — el leac'h ma chomont betek poent-sarra, hag awechou diwezatoc'h. Abred o dezo kollet o gened, o brud vat, o fortun hag o ene marteze.

Hag ar re-se ar yaouankizou-se, a zo e pep-hini anezo danvez eul « Laouig lounker », eo bara kalz ostizien a zo.

Ma n'eo ket eur vez ! ! !

### Eur bedennig evit :

ADORASION AR C'HLOSTR-  
PLEYBEN, gant an Tadou  
Barnabe ha Fuljan. (4-10  
Kerzu.)

RETRED LANDIVIZIO, gant  
an Tad Medard (4-8 Kerzu).

RETREJOU ETEL HA GROE,  
gant an Tad François de Pau-  
le. (3-25 a viz Kerzu.)

MISION AN TREOU (le Tré-  
hou) gant an tadou Barnabe,  
Fuljan ha Medard. (8-25 a  
viz Kerzu.)



# Komzou flour... Oberou kalet !

« Katoliked, va breudeur, astenn a reomp d'eoc'h hon daouarn, deuit ganeomp hag e stourmimp a-gevret evit rei da holl labourerien ar bed, peoc'h, bara ha liberté ! »

Setu komzou flour an Ao. Thorez mestr-bras ar Gomunisted.

Met ne oant nemet komzou.  
Abaoe eo chenchet penn d'ar vaz.

\*

\*\*

Ho c'hazetennou ne ehanont ket da sila e kalonou o lennerien kasoni enep d'ar Gatoliked, dre gonta gevier d'ezo; dre rei d'ezo da gredi eo an ilizou, ar c'houenchou, toulloukuz dastumet enno leun a armou. « L'Œuvre », kazetenn ar Frañmasoned a skrive d'an 28 a viz Here :

« On raconte... » dans la région des Vosges (nec'et e vefe evit lavaret e pelec'h) qu'un curé a reçu « de lourdes caisses soigneusement clouées qui portaient toute la mention « Fragile ». Aux ouvriers qui procédaient aux opérations de déchargement le prêtre disait :

— Attention, mes amis, manœuvrez doucement, ces caisses contiennent un « Chemin de Croix » précieux, N'allez pas me l'abîmer.  
— Entendu, monsieur le curé.

Or, un jour, malgré ces recommandations une caisse tombe et se casse.

Stupéfaction des assistants. Confusion du curé. De la caisse éventrée se répandent à terre des fusils et des pistolets. »

« De lourdes caisses » ? n'eo ket possubl, Framasoned paour ! Pet « boest pounner » eo eta ret kaout evit lakaat 14 taolenn Hent ar Groaz ? Lavarit d'eomp'ta mar plij !

\*

\*\*

« Astenn a reomp d'eoc'h hon daouarn ! » Ya ! Ya ! klevet eo !

Astenn a reoc'h ho taouarn ? Ya, da derra d'eomp hor penn.

D'an 9 a viz here diweza, e leur-c'hoari skol laïk Ivry-

Centre, tri « falc'hun ruz » (ar « falc'huned ruz » e galleg « les faucons rouges » eo hano ar genseurtiez savet evit o yaouankizou gant ar gomunisted, eur genseurtiez dem-henvel ouz hini ar Skouted katolik, met skarz et anezi, sklaer eo, pep kredenn gristen) o deus faoutet e benn da Jacques Baduel, 11 vloaz, an eil eus eur familh a c'houec'h krouadur, a zo an tad hep labour.

Met perak ha penaos o deus graet kement-all ? Perak ? Dre ma 'z eo ar paotrig evel ma vez lavaret e Ivry « un curé », rak eno an holl a zo « communiste » pe « curé », Mont a ra d'an oferenn ha d'ar patronaj...

Penaos ?

Ar vugale a c'hoarie el leur-c'hoari. War zigarez m'en doa ar paotrig-man direnket, eun tammig, ebatou e gamaladed, tri baotr bras a sailhas warnan hag a skoas gantan a daoliou boutou hag a daoliou dourn en eur lavaret : « Sale graine de curé... on vous crèvera tous ».

Evit echui an abadenn e krogont ennan hag, eus o holl nerz, e stokont d'ezan e benn ouz ar voger.

— Ha ma lavares eun dra bennak, klevet a res, e vezo graet da affer d'it.

En ospital eman ar paotrig, trepanet eo bet...

Ha setu petra lennêr e journal an Ao. Thorez « Le Travailleur » :

« ...Il s'agit tout simplement d'un regrettable incident honteusement exploité contre la municipalité et les maîtres de l'école laïque.

« Ajoutons que l'état de l'enfant n'est pas grave; d'autre part cet enfant souffre d'une otite et d'une petite méningite, et il n'est nullement prouvé qu'il s'agisse des suites de l'accident survenu à l'école... Les ennemis du peuple oublient que la politique de la main tendue est pratiquée à Ivry. »

Klevet a rit, tud vat ? N'eo ket gwall glanv ar paotr... n'en deus nemet eun tammig « meningite »... Ha c'hoaz n'eo ket an « accident » digouezet a zo penn abeg da gement-se... eo moarvat ?

\*

\*\*

Nann, nann, Aotronez komunist, ne ankounac'haomp ket eo astennet ho taouarn ganeoc'h... da faouta e benn d'eur c'hrouadurig 11 vloaz.

Ablamour ma'z eo « curé ».

PETROMIK.

## MISION 1 BRAS LOC-MARIA-PLOUZANÉ



An Tad Quinquis, war varc'h e penn ar prosesion.



Ar « gapusined » vihan....



Ar « groazidi » a  
bedas ken c'houek  
epad ar mision.  
Bennoz Doue  
d'ezo



Bugale Mari o tougenn skeudenn ar  
Werc'hez, o mamm ha patronez

## AR MARO

(kendalc'h.)

Pegen dall eo an den ! Ne soñj ket kalz er maro, evel pa ne dlefe ket mervel .

Bremañ e welan splann. Trugarez d'eoc'h o va Doue, da veza va dihunet : eun huñvre pouenner a sorc'henne va spered. Lamet hoc'h eus diwar va daoulagad ar rouedenn deo ha teñval a guze ouzin va stad truezus.

Diskouez a rit d'in ho madelez trugarezus, ho karantez dispar em c'heñver. Grit d'am spered kompren gwirionez vras ar maro, ma ne vin ket skrapet gant an ankou araok beza soñjet ennañ. Lakait ennoun eur c'hoant gredus, eur youl start da ren eur vuhez santel evit kaout eur maro mat.

Nag a gemm etre soñjou eun den yac'h-pesk ha soñjou eun den klañv. Pegen disheñvel an traou dirak daoulagad ar c'hlañvour ! Enor, dañvez ha plijadur ! Peger kaer an traou-se evit eun den hag a zo yac'h e galon ! Hogen, pa wel emañ klañv da vervel e teu da anaout ar wirionez. An enoriou a dec'h buan; ar madou a ziflip aezetoc'h diouz an dourn eget ne zeuont e-barz; ar blijaduriou a dremen en eun taol ha ne lezont war o lerc'h nemet anken.

Dall eo an den eta o klask gant kement a youl hag o virout gant kement a breder ar pez a lamo ar maro digantañ, a-raok pell !

Diskiant an neb en em laka dindan beli ar bed, peogwir ne zigoll nemet evelse ar re a zo troet d'hen servija. A ! Salver Jezuz, ne fell mui d'in mestr all ebet nemedoc'h. C'houi a vo roue war va c'halon. Ne c'hallo biken ar bed beza trec'h d'am c'halon. Biken mui n'am sorc'henno, na gant e enoriou, ma gant e zanvez, na gant e blijaduriou !

\*

\*\*

Pa vezin astennet war va gwele, brevet gant nerz ar c'hleñved, gwasket gant ar maro, pebez anken, pebez rann-galon evidoun neuze, m'am bez heuliet ar gizioù fall gant aon da veza goapast, redet war-lerc'h plijaduriou kablus gant aon da veza disprizet, pleget d'am gwall-dechou, war zigarez ma 'z eus darn hag a ra gwasoc'h ! Pebez enkrez !

Na frealzus e vo evidoun, em c'hleñved diweza, m'am bez dalc'het a du gant Doue, torret va gwall-dechou, troet keñ d'am fall-blegiou, trec'het an tentasionou, pellaet diouz an darempredou fall, m'am bez sentet mat ouz an Aotrou Doue, miret e lezenn santel, darempredet alies ar sakramanchou, m'am bez kinniget da Jezuz va zrubuilhou, gouzañvet gant pasianted, douget va c'hoaz kalonek abalamour da Zoue ! Pebez eur vad !

Setu ar pez a garfen neuze beza graet. Setu ar pez a rin pep deiz evel pa vefe an devez diweza eus va buhez.

Kofesaat ha komunია a rin evel pa vefe ar wech diweza d'in d'hen ober.

Met, hepdoc'h, o va Doue, ne c'hallan netra, netra ebet evit ar Baradoz.

Daoust peger bras eo ar c'hoant am eus da zerc'hel a du ganeoc'h tra ma vevin, ne c'hallin ket kaout eur maro santel ma ne roit ket d'in ar c'hras-se, o va Doue. En ano ho Mab Jezuz, abalamour d'e vuhez kalet ha d'e varo glac'harus, ar c'hras-se a c'houlennan diganeoc'h.

Gwerc'hez santel, Difennouez ar bec'herien, gouzout a rit an ezomm bras am eus eus gras Doue, peogwir hepti ne c'hellan ket beza salvet. Goulennit ar c'hras-se evidoun digant ho Mab Jezuz. Santez Mari, Mamm da Zoue, pedit evidoun *bremañ*, evit ma troin keñ d'ar bed ha d'am fallentez; *bremañ* evit ma rin oberou santel, *bremañ* evit ma soñjin alies er maro; *bremañ* ha da eur va maro !

Kemerit evit hoc'h ene an daou vokedig-mañ :

*Soñjit en hoc'h eur diweza ha biken pec'hed na reot.*

*Marteze n'hoc'h eus nemet eur gamed d'ober evit mervel.*

(Adskrivet gant GOURNADEC'H.)



## Er Spagn - Ar veleien merzeriet

*N'eo ket eur pajenn peziou met eul levr a-bez e vefe ret skriva diwar-benn torfedou dispac'herien ar Spagn.*

### Maro Person Ripoli

*E-penn kenta ar brezel e voe taolet er prizon. Eun nebeud dervezioù goude e voe laket en tren, an dispac'herien n'o doa ket kredet e laza e-kreiz kêr, gant aon da strafuilha kêr-re an holl.*

*E kêr Alp e chomas an tren a-sav. Gwarded a oa eno er « gar ».*

*— Eur beleg a zo aman ganeomp, eme unan eus ar sourdaded; roet e vo d'eoc'h da laza ?*

*— Ya, va emezo.*

*Ha war an taol e voe taolet d'ezo. — « Warc'hoaz da beder eur, eme d'ezan ar gwarded, e vezi fuzuilhet ». Da beder eur ne zeue den ebet.*

*— Paotred, eme ar beleg, an eur eo.*

*— Ya, ya, n'hon eus ket ankounac'het.*

*N'ho doa ket ankounac'het gwir eo, met « ar re yaouank », rak ar re-se dreist-holl eo mistri ar freuz hag ar reuz, a fellas d'ezo e vefe lazet ar beleg gant « ar re goz ». Evelse pep hini en defe graet e lod-labour evit peurgarza ar « Republik » eus ar ouenn fall-se m'eo ar veleien.*

*— Ha dreist-holl, a lavara ar re yaouank, na skoit*

ket ebïou; ma ne gouez ket ar beleg c'houi eo a vezo diskaret.

An holl a zo breman war blasenn an iliz. Ar beleg a zo en e e-zav ouz an nordal. Pa well dirazan e vourrevien gant o fuzuilhou e sav e zorn dehou hag en eur rei d'ezo e vennoz e lavar :

— A galon vat e pardonan d'eoc'h. N'helle ket sevel war va c'halon c'hoant eur maro kaeroc'h, maro eur merzer. Digeri a ray d'in, fizianz am eus, dor ar baradoz.

Neuze e reas sin ar groaz hag ec'h astennas e zivrec'h ouz an nor-dal.

Ar re goz, gant o fuzuilh, ne finvent ket. Grosmol a savas e-touez ar re yaou-ank.

— Ma trofe e benn en tu all, eme unan eus ar re goz, e vefe aesoc'h tenna hep gwelet e zremm.

— Biken, eme ar beleg. Ne grenin ket o welet an tennou o tont eus genou o fuzuilhou.

En taol-man an tennou a strakas hag ar beleg a gouezas a-stok korf war an dou-ar.

### Pasion Person Torrijos

O tec'hout diouz Ker Toledo, kouezet etre daou-arn soudarded Franco, e ti-gouezas an dispac'herien e kerig Torrijos. Eno e oa chomet ar beleg e-touez e zenvedigou...

Setu eur vandenn ailho-

ned dirak e brespital. Eman tennet eus e di ha taolet war an hent. Goulenn a raer digantan goapaat ha nac'h e Zoue.

— Birviken ! emezan.

Neuze e tiframmer digantan e zilhad hag e sammer war e skoaz eun treuz pounner. Eur sae ruz o deus laket d'ezan ha war e benn ez eus eur gurunenn spern. Leun-wad eo ar paourkez beleg.

Er stad-se, beac'h d'ezan o chom en e sav, e rank ober tro kear.

Epad tri dervez diouz renk e ra an dispac'herien ar prosesion euzus-se. Ne ehaner ket da c'houlenn outan nac'h e feiz; met chom a ra divrall.

Petra'ta vo graet anezan, eme ar mistri, e laza a dao'iou fuzuilh pe e staga ouz ar groaz ?

Hag e voe lazet ar beleg paour en eur park, tostik d'e gear.

### An Tad Gafo

Da zeiz gouel Jezuz-Krist-Roue eo bet lazet an Tad Gafo, relijius domini-gad.

N'eo ket er Spagn hepken, met ivez e diavez bro e oa brudet an Tad Gafo. Eur spered digor a zen, ar manac'h-man a bleustre war ar skianchou dounna, hag ar bed katolik a-bez a zo e koanv d'an den santel ha gouizieket lazet, hep rak na perak, gant an « dispac'herien ruz. »

GLOVO.

## HUNVRE HA PEDENN



Fr. De Jb

Kaout a rae d'in e oa dija digouezet noz Nedeleg hag en doa Doue roet d'in diouaskell skanv evel re an alc'houeder, hag e saven en er uhel uhel... evit klevet gwelloc'h kan

eledigou ar baradoz, evit gwelet ivez penaos e tigemer ar bed, hirio c'hoaz, e Salver.

Hag e welen tud, milionou ha milionou anezo, siouaz ! ha n'eus evito na Pellgent, na kraouig Betleem, na Mabig Jezuz, na Gouel Nedeleg.

Ouz paianed paour ar bed, o Mabig Jezuz, ho pet truez me ho ped. E-kreiz an denvalijenn m'int beuzet enni, lakit da skedi ar steredenn venniget o hentcho beteg ho kraouig.

Hag e welen tud all c'hoaz; bras an niver anezo ivez. Evit ar re-man e oa enn nozvez Nedeleg, n'eo ket siouaz evit mont da zaoulina dirak kavel Mab ar Werc'hez, met hepken evit debri hag eva a-hed an noz...

D'an denved dianket-se, o Mabig Jezuz, o deus ankounac'haet o ene, kasit unan eus ar bastored a zo aze daoulinet en ho kichen, eur Pastor Mat, evit o diarben diwar an hent fall ha digas da sonj d'ezo o deus eun ene.

Hag e welen c'hoaz tud all, ar re-man n'oant ket ken niverus, met e pep korn eus ar bed e oa anezo evelato. O gwelet a raen o kerzout dre ruiou bras ar c'hêriou, dre strêjou ar maeziou, dre wenojennou ar c'hoajou doun, warzu o iliz ha dirak ho kraouig e taoulinet.

O Mabig Jezuz, dalc'hit e kalon an dud-se ar garantez o deus evidoc'h, kreskit an niver anezo; ha c'houi, Gwerc'hez Vari, deskit da bep hini anezo kempenn en e galon, eur c'havelig flour ha tomm evit digemer ho Mabig.

MABIG BREIZ.

## Paourkez mamm !



D'ar zul kenta a viz here, an aotrou person a lavaras ar c'homzou-man d'e barresioniz : « Kerent  
« Kristen, er zizun-mañ e  
« tigo ar skol gatekiz er  
« barrez. Abenn vremen  
« ho peus kaset ho pugale  
« d'ar skol. Eno e vo des-  
« ket d'ezo : lenn, konta,  
« skriva, ar pez a zell eus  
« skianchou ar bed man.  
« Ret eo rei deskadurez  
« d'ar vugale evit ma  
« c'hellint ober o zreuz  
« war an douar. Brasoc'h  
« dever eo c'hoaz kouls-  
« koude evidoc'h deski  
« d'ho pugale ar pez a  
« zell ouz skianchou ar

« Baradoz; da lavaret eo ar c'hatekiz. Digasit eta ho pao-  
« tred hag o merc'hed bihan da skol an Iliz. Epad pemp  
« devez bep sizun e vo graet skol d'ezo gant o mistri hag  
« o mestrezed. Ni o peleien, ne c'houlennomp diganto dont  
« d'ar skol gatekiz nemet diou wech ar zizun. Nebeut eo a  
« dra zur; ret eo eta e ve aketus an holl vugale da zont bep  
« tro, hep mankout gwech ebet. Grit d'ezo deski mat o  
« c'hentel bep gwech. Eun dever striz eo evidoc'h, tadou ha  
« mammou. Ha c'houi bugale, diskouezet bolontez vat lakit  
« ho poan, priziou zo da c'hounit. »

\*\*\*

Eiz devez goude, e Kervenn, eun tiegez eus ar re gaera  
e parrez Landrezeg. Ar pôtr kosa a zo d'ober e bask kenta.  
E skol dizoue ar barrez eman, daoust m'o defe e dud aes  
awalc'h d'e gas d'a skol gristen ar c'hanton. Met, allas, ar  
vamm Katell, a zo eun tammik tost d'he arc'hant hag ous-  
penn n'he deus ket re a feiz da bresta da zen.

KATELL AR VAMM — « Ac'hanta, pôtr, bet out bet  
er c'hatekiz ? »

JULIG — « Ya, mamm. »

AR VAMM — Gouezet e peus da gentel ? »

JULIG (mezek) — N'em eus ket.

AR VAMM — N'e peus ket ? Petra c'hoari gant ar fri

lous man ? Gouzout a rankez, pe me welo. Allo, kemer da  
leor ha buan. Dalc'h sonj mat e rankez beza da genta, evit  
ma vezi laket da lenn deiz ar Paskou. Ar priz kenta a rank  
dont da Gervenn, klevet a rez ? Arabat eo e vefe Yvonig  
Kervenn vihan, potr ar mevel, en da raok; eur c'houtous  
fall evel hennez ha ne c'hell ket zoken kaout eur bragez  
nevez evit ober e bask. Elec'h te, va fôtr, a vo prenet d'it eur  
wiskamant nevez flamm, seurt n'eus ket gant mat ar Roue.

Eur miz goude...

AR VAMM — Selaou'ta, Julig, deus aman eun tammig  
d'am zikour da gignat patatez. Paket oun diwezat gant  
koan. Allo buan !

JULIG — Mamm, va c'hatekiz am eus da...

AR VAMM — Sell'ta, ar pabor man. Da gatekiz a lava-  
ran me ivez ! Petra ? N'eus nemet digareziou gant ar  
mec'hiek-man. Kas da gatekiz da zutal brulu. Awalc'h a ou-  
zout. Allo, sikour ac'hanon da ober va labour, daoust ha de-  
ver kenta ar vugale n'eo ket sikour o zud ? allo, deus raktal.  
gortoz, gortoz e pelec'h eman va baz ?...

E miz kerzu, eur yaouvez...

AR VAM — Da belec'h emhout o vont, Julig ?

JULIG — D'ar skol gatekiz, mamm.

AR VAMM — D'an iliz, gant an amzer man ?

Ker yen all ma 'z eo. Te hag e peus eur c'horfad arruma-  
dur. Na di ket, nann, nann. — Petra zonz an aotrou person  
oc'h ober katekiz pa vez ker fall an amzer ? Ne vo kountant  
nemet pa pezo paket eur flipat fall bennak. Anet eo n'oar  
ket petra eo kaout bugale. Hirio e chomi er gear, ha disul,  
ha diziou,.... ken na deuo tommoc'h an amzer.

E miz genver...

AR VAMM. — Petra rez aze, mabig ?

JULIG — Deski va c'hatekiz, mamm.

AR VAMM — D'an eur man ? Eiz eur noz anei hag  
emaout o c'hoari gant da gatekiz ? Ha da genteliou all ? desk  
ar re-ze da genta, ar c'hatekiz a c'hell gortoz. Warc'hoaz en  
eur vont d'ar skol e po amzer awalc'h... Met, da dreid a dle  
beza sklaset, allo, d'ar gwele !

E miz c'houevrer...

AR VAMM — Sell, Julig, kas al lizer man d'an aotrou  
person. Disul kenta ne di ket da skol an iliz, rak da vaero-  
nez a zeu d'hor gwelet. Petra zonzfe ma ne jomfe ket he  
filhor ganti epad an deiz. Ar gerent da genta, ar c'hatekiz  
da c'houde.

**E miz meurz...**

Julig, da c'hedal koan, a zo o c'hoari gant Bibi ar c'hi bihan.

AR VAMM — *Klev 'ta Julig, n'eo ket c'hoari e peus d'ober, poent eo d'it gouzout da gatekiz. An « interroj » a zo a-benn pemzek devez. Ha diouall da veza korbellet, entent a rez, ma n'e peus ket a c'hoant da gaout an torch listri. Ar priz kenta a rank dont ganez, kousto pe gousto. Allo, en em laka da vat. Sell, ro d'in da leor ma welin ha gouzout a rez eun dra bennak. Allo, respont 'ta ! N'ouzout ket ? ah evelse eman an traou ? Dal, an dra man marteze a zigoro da sperd.*

Dorn pounner Katell a gouez war benn ar potr. Julig kêz en em laka da vlêjâl, ar c'hi bihan da yudal. Spered ar pôtr n'eo digoret tamm hag al leor katekiz a jom serret.

**Deiz an interroj...**

Holl vugale ar Pask kenta a zo renket en Iliz ; ar bôtred en eun tu, ar merc'hed en tu all. Eun tammig terzienn a laka o mouez da grena. Respont a reont fraez ha didroidell, eur blijadur eo o c'hlevout holl, nemet... Julig a Gervern. Heman a fazi bep taol. Echu an abadenn. Gant piou ez ayo ar priz kenta ? N'eo ket gant pôtr Katell eo sur awalc'h.

D'ar zul warlerc'h an « interroj » an aotrou person a bign er gador hag a lavar :

— *« Kerent kristen, echu eo ar bloavez katekiz. Diziou eman deiz ar Pask kenta. Laouen oun o lavarout o deus ar c'halz eus ar vugale poaniet epad ar bloaz. Meuleudi d'ezo. Bennoz ivez d'an tadou ha d'ar mammou o deus kemeret preder gant o bugale hag o deus o sikouret da gas a labour da benn. Ar vugale o deus poaniet a vo digollet eus o foan hag a resevo diziou priziou kaer.*

**Deiz ar Paskou...**

Ar priziou a zo rannet ; pep hini en deus bet ar priz en deus meritet.

Yvonig, a zo deuet gantan ar priz kenta : eul leor kaer : Buhez Hor Zalver Jezuz-Krist.

Ha Julig, pôtr ar Gervern ? Julig n'en deus bet netra.

E vamm, Katell, sounn he fenn hag he daoulagad o lugerni evel keffou tan, a zo aet d'ar sakreteri. — *« Aotrou person, deuet oun da c'houlen ouzoc'h perak n'en deus bet va fôtr priz ebet, kement all a boan en deus kemeret da zeskki ha kement all am eus me poaniet gantan, o paourkez bihan ! »*

Hag an aotrou person, en eur heja e ziouskoaz a respontas hepken : PAOURKEZ MAMM !

(MELEGAN)



**Evit tud vat Coatmeal...**

N'HOR BEUS KET BET, ER MIZ-MAN ? AMZER  
DA GEMPENN POLTREJOU AR MISION EVIT O  
LAKAAT ER GELAOUENN.

**Evit ar Misioner Paour ....**



An tad MARIE-URBAIN a lavar bennoz d'an holl dud vadelezes o deus roet evitan eun aluzenig.

Pedi a ra evito.


Eun timbr a zek gwenneg hepken a vezo digemeret gant anaoudegez vat.


Kas an aluzennou da :

PERE MEDARD

Couvent des Capucins

ROSCOFF (Finistère).





# Allo.. Allo!. Buan, Buan

Paeit ho koumanant d'Ar Vuhez Kristen. Na c'hortozit ket ma vo goulennet diganeoc'h diou pe deir gwech. Hor sikourit, mar plij, da herzel ouz hor mizou, a zeu da veza bemdez brasoc'h brassa, p'eman pep tra o keraat.

Piou 'ta 'zo kiriek da gement-se, nemet ar « FRONT POPU... LAER ».



Beva er Russi, war a gonter, a zo eun dudi ! Baradoz an Douar, gant e holl binvidigeziou ne oa nemet an tañva eus hini Komunisted ar Russi !

Chê, va zud vat !

Met neuze, perak holl gomunisted hor bro, hag a zo, diouz o c'hlevet, « les damnés de la terre, les marcheurs de la faim », n' eont ket da dañva friko da vro ar Sovieted ?

Kalz eürusoc'h e vefent... ha ni ivez !

